

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Ur mab kloareg

Va mamm he doa ur mab kloareg,
A garie kement ar merc'hed,
Ha pokit de'i ladiralonlure, touchez-pas ladiralonla.

[en doa]

Pa 'zeas da weled e vestrez,
Ec'h en em wiskas e maouez.
Ha pokit...

Entreit dimezell deuit en ti,
Da c'hedal koan da zareviñ.

Ha pa voe koan darevet,
An dimezell na zrebas ket.

Perag dimezell na zrebit,
Met mard oc'h klañv e lavarit.

Me n'on na klañv na chagrinet,
Met va unan ne gouskan ket.

Te gousko gant va c'hoar Janed,
E-pad un div pe deir nozvezh.

Pa voe graet an nozvezh kentañ,
An dimezell 'doa kousket mat.

Goude an eil pe an trede,
Kaoz dimeziñ sur a save.

Neuze 'voe graet an eured,
Hag o-daou 'oant fortuniet.

Neuze 'werzhas e jupiliz,
Da brenañ laezh ha bleud gwinizh.

Neuze 'werzas e soutanenn,
Da brenañ pallenn ha lurenn.

Ha pa 'voe ganet ar bugel,
Lakaet ar vamm-gozh d'e luskell.